

## Kenvreuriez Breiz-Izel (1869)

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Eur galon, eur yez, eur feiz...

An 31 a viz Eost diweza, al lizer a zo amañ war-lerh a zo bet kaset d'eun niver braz a dud ouizieg euz a Vreiz ; hag oll o-deus degemeret mad ar mennoziou a zo e-barz. Hogen, o veza ma oad en em gemeret re ziwevad da rei kelou euz ar pezh a oa c'hoant da ober, bez' a zo ha n'o-deus ket gallet dond, koulskoude an darn-vuia a zo bet hast vraz warnezo da zegas deom lizerou kaer, ken e galleg, ken e brezoneg, ha karoud a rajed o lakaad oll amañ. O veza n'heller ket, plijet ganto kavoud mad e larfem eun draig bennag da vihana euz ar pezh o-deus skrivet deom

Setu al lizer a zo bet kaset en-dro.

Kenvreuder gêz,

Degouezet eo an amzer ma tleom en em glask, hag en em zastum oll evid en em anavezoud gwelloc'h, en em garoud hag en em glevet evid mad ar vro hag or yez koz, ar brezoneg. Red eo ma ouezo pep hini en pep korn Breiz-Izel ha Bro-Hall ivez n'om ket maro c'hoaz, evel a lavar kalz, hag ez om beo-buhezeg ha beo ivez en on touez spered ha skiant on tadou-koz.

En em glevom eta, en em garom ha bezom unan oll, ha marteze Breiz-Izel a raio c'hoaz komz anezi.

N'eus netra falloh evid en em zerhel bepred pell an eil euz egile o veza n'en em anavezet ket. A-hend-all, oh en em zerhel pep hini en e gêr, dibaot eo ma reer eun dra bennag a vad, evel pa en em weler aliez, pa en em gelenner a galon vad, pa en em garer en eur ger. Gwad eur Breton a dle en em domma diouz gwad eur Breton all, hag oll e tleom en em harpa evel gwir vreudeur, evid mad pep hini hag an oll, adreist pep tra, evid enor ha mad ar vro hag or yez koz ar Brezoneg.

Gwella zo da ober bremañ evid kement-se eo en em zastum eur wech an amzer - eur wech ar bloaz -, ma ve kavet mad, - en eur gêr bennag a Vreiz-Izel, evid en em weled, serri a galon dorn pep hini, en em anaoud, en em garoud, en em glevet war kement a zell ouz mad ar yez, hag or bro Breiz. Goude kana pep hini e werz pe e zon ha neuze kimiada an eil diouz egile evel breudeur, o lavared : Kenavo bloaz, breur ker !

E meur a leh e weler ober se ; evel-se e ra or breudeur euz an tu all d'ar mor. Greom evelto, pedom spered on tadou koz da veza ganeom bepred, pedom Doue ivez ma teuio pep tra da vad.

Pa vezim oll dastumet evid ar wech kenta en em glevfom war an oll draou-ze ha war galz a draou all na gomzom ket ket aneze amañ. Ne houlennom en on touez nemed gwir Vretoned, a gomz pa a skriv yez or bro, hag a gar anezi evel o mamm.

D'an 31 a viz Eost 1869, e pedom ahanoh da en em gavoud e kêr Vontroulez evid en em glevet etrezom ha klask an tu da ober erur Vreuriez Vreiz-Izel kreñv ha paduz ; starda dorn peb mignon a vo greet eno, komz brezoneg, ha kana.

Ha goude kimiada, mignoned oll o lavared : Kenavo da vloaz !

E Montroulez, d'ar 14 a viz Eost 1869.

Ar Yann ; G. Milin ; An Uhel ; Proux ; J.P.M. ar Skourr.

Respontchou :

Plijadur vraz a ra din gweled evel-se eun tamm buhez o sevel e kalon ar Vreizidi, pere a gar c'hoaz o bro hag ar brezoneg, yez on tadou.

Y.K. Kersale, beleg Salet.

Gand kalz a levez e welan ahanoh poanial gand ar brezoneg, Aotrounez, hag e pedan Doue, ar Werhez d'ho penniga.

M.P. Kemar, person Sant Laorañs.

Plijadur ha levez d'an oll varzed a yelo, an deiz-se, d'ho kweeled.

J.V. Jonkour,beleg e skolach Plougernevel.

Me 'zo hag a vo da viken

Gand eur galon hwek ha dibrenn

Ho mignon J.L.Keineg

A gar meurbed ar brezoneg !

J.L. Keinneg, peson ar Hloastr.

Lennet am-esu penazo Homer

Ar brasa euz an oll varzed

En e gozni leun a vizer

A gollas, siwaz, ar gweeld !...

Ar barz a yee a zor da zor,

Gand e gi evid klask e voued ;

A zaelou e rede eur mor

War e ziuvalvenn dizehet.

(Ar peurrest e galleg).

Le Joubioux, beleg roman.`

Netra ne ra mui a blijadur din eged gweloud an dud a skiant oh ober stal euz or brezoneg hag euz or Breiz vuia-garet. Mar savit eur Vreuriez etrezoh da skoazia hag enori or yez, e vezin unan euz ar genvreudeur.

YannWillou Herri, beleg e klañdi Kemperle.

Eur blijadur vraz e ve evidon en em gaoud gand tud ouizieg ha kaloneg pere a labour gand kemend a aket evid astenn buhez or brezoneg a yee d'ar bez evel eur vamm dilezet gand he bugale.

Perrot, person Taole ;

Trugarez deoh da veza degaset din eul lizer, evid ma fedo da 'n em gavoud an 31 a viz Eost, er gêr a Vontroulez.

A. Dubourg, beleg skolach Landreger.

**D'ar re o-deus klevet**

*War don ar Varivonig*

Ni ho trugareka meurbed  
A-greiz or halon, mignoned.

Pa'z oh deuet da Vontroulez  
Da zikour sevel ar Vreuriezh.

A galon vad hoh-eus lennet  
Ar pezh or-boa deoh-hu skrivet.

Ha gwir vugale Vreiz-Izel  
Amañ oh diredet a-bell.

Eur galon eo or halonou  
Eur gwad eo gwad or gwaziu.

Hag or harantez evdid Breiz  
A zo ker paduz hag or feiz.

Ar brezoneg, yez on tadou  
A zeskas deom or mammou.

M tiprifem yez Vreiz-Izel  
Ni a zisprizfe or havell.

Gand eur vamm vad eh om ganet  
Ha gand dour santel badezet.

A-bell, a-dost, ni 'zo eur ouenn  
Vretoned vad, koulz kristenien.

Evel breudeur bemdez bevom,  
Evel breudeur en em garom.

Dalhom bepred da yez or bro,  
Ha meuleudigez or-bezo.

Kreñvoh eo daou eged unan,  
Red eo boud kalz da laza tan.

Bezom eur horv hag eur spered  
Or Breuriezh a bado bepred.

Mad eo bremañ kuzulika,  
Da bep hini, laret e dra.

Hogen a-roag trei al lañchenn  
Azezom kichenn-ha-kichenn.

Ni ho trugareka meurbed  
A-greiz or halon, mignoned.

Pa'z oh deuet da Vontroulez  
Da zikour sevel ar Vreuriez.

On anaoudegez vad 'zo braz  
Hag or harantez brasoh c'hoaz.

Ar Yann ; G. Milin ; An Uhel ; Proux ; J.P.M. ar Skourr.

# REIZ

## Vreuriez Vreiz-Izel

### I

Savet eo Breuriez Breiz-Izel

### II

Kent evid beza er Vreuriez e vezo red beza degemeret e-barz gand ar Rener, ha daou euz ar Genvreudeur.

### III

Red e vezo gouzoud komz pe skriva ar Brezoneg kent dond er Vreuriez. Trugarekaet e vezo kement hini a raio eul labour bennag dre skrid evid mad hag enor ar yez hag ar Vro.

### IV

Koulskoude an dud ouizieg a beb bro, petra bennag ne oufent ket ar Brezoneg, a hellfe dond er Vrzeuriez.

### V

Ar skridou savet gand unan euz ar Genvreudeur ha roet d'ar Vreuriez gantañ, a vezo moulet diwar he houst hag a vezo miret ganti.

### VI

Beb bloaz e vezo moulet eul leorig greet gand labouriou ar Genvreudeur, hag el leorig-se e vezo kavet an doare euz a gement a vezo tremenet er Vreuriez e-pad ar bloaz. Al levr-se a vezo kaset d'an oll Genvreudeur.

### VII

Eur Rener a vezo anvet evid eur bloaz hepken war eun dro.

### VIII

Ar Rener, pe an ad-Rener, ha gantañ c'hweh Kenvreur, a roio kuzul, pa vo ezomm, war ar pezh a zell ouz ar Vreuriez.

### IX

Eun Teñzorier a vezo anvet, ha da henez e roio pep Kenvreur e ugent real ar bloaz.

### X

Beb bloaz e vezo kanet eun overenn evid ar Genvreudeur dremenet, ha greet eur pennad-skrid el levrig evid derhel soñj anezo.

### XI

An Aotrou Godefroy Brossais Saint-Marc, Arheskob Roazon, a zo bet anvet, gand an oll Varzed, Rener a enor evid bepred, e Breuriez Vreiz-Izel.

XII

An Aotrou Augustin David, Eskob Sant-Brieg ha Landreger, a zo bet anvet gand an oll Varzed, Rener a enor evid bepred, e Breuriez Vreiz-Izel.

XIII

A zo bet anvet Yann-Per-Mari Ar Skourr, Rener.

Yann Hingant, eil Rener.

Etienne, Teñzorier.

Yann-Mari ar Yann ; Fañch-Mari an Huel ; Charlez a Vro-Hall ; Gabriel Milin ; Prosper Proux,

Skrivagnerien Breuriez Vreiz-Izel.

*Evid testeni gwirion,*

Rener Breuriez Vreiz-Izel

**I.P.M. Ar Skourr.**

*Greet e Montroulez, d'an 31 a viz Eost, er bloavez 1869.*